

## CHANSON NEVEZ

*Var sujet glac'har ha tristedigez daou den  
yaouanck demeus a baros Speyet, pres  
da vervel gant ran-galon.*



Tud yaouank deus ma faroz, didosted, me o ped  
Da zilaou ar vuez a zo guenin erruet ;  
Me zo eur sergent-major, tistrei deus an armeio  
Rejouisset ma c'halon, o entreal bars ar vro.

Pa voan me partiet, da gommanç va c'honje,  
Moa losquet var ma lerc'h objet va c'harante  
Moa losquet var ma lerc'h fleuren ar yaouankis,  
Evit mon da ober eur c'hampagn, tressec ar guer a Baris.

Epad pever blas anter, e zon bet e regiment,  
Hi neus gret va oll chagrin a va brassa tourmant ;  
Bemnos a bep mitin, a pad an deiz aliez,  
Va speret a uije betec ty va mestres.

Ma speret a nije betec va bro beniguet,  
O sonjal a heb momet bars va amzer passeet,  
C'hoarvezout a re guenin e guis ar durzunel,  
Pa ve collet ganti e far a non dol da vervel.

Guenime, tud yaouank, a c'hoarvezet memes tra.  
Glac'haret bras a voan o tond da partia,  
Rannet a voa va c'halon o toned d'he c'huitad,  
Hi pa velas ac'hanon e devoa calonat.

Eiz devez arog partial visemp assembles bemde,  
Ac eur sulvez d'abardaë hi a lavaras di-me,  
An daelo n'hi daou lagad, hi moues entrecoupet :  
— Petra rin-me, den yaouank, pa vec'hn partiet.

— Me ya da vont breman da ober pinijen,  
Da laqua lioua e du va oll dillajou guen.  
Evit ober caon da va mufa caret,  
Partiet evit a Republik en deiou tremenet.

— Pa vec'hu erru n'ho regiment, me o ped va servicher  
Da rei d'in ho quehellou ractal dre eur lizer,  
Me a meus chagrin bras gant aon a vec'h casset,  
En tu all dar mor bras guis dar vartolodet.

Ar blaves mil eis cant tri uguen a daouzec,  
Da zevet gouel an Nedelec, a voan-me partiet.

Da zevez gouel an Nedelec, da zeg heur deus an noz  
Pa voa ma c'hamaradet o c'hont da repos.

Voan o font ti va mestres, da laret dei quenavo.

Hi pas velas a c'hanon a gommença gwelo,

— Arça eta, den yaouank, moc'h o vont er mes ar vro.

Beuzet e ze ma c'halon, en eur mor a zaelo.

Quenavo a laran d'hoch, quenavo, va mestres,

Ben ar pevar pe pem bloas n'hi n'hom gavo assembles,

Hi a vouches din neuse, n'hi daou lagad an daëlo,

Hac a coueas d'an deuar casi guis deun den maro.

Dan de cuenta blas, voan erru bars ar guer a ruel,

Cetu me scrivas eul liser d'am mestrezic fidel,

Hi a respontas din, pevar devez goude,

Penaos a voa clan, clan bras var hi gouele.

— Mar na teud quet d'am c'honsoli, ma servicher fidel,

Gant ar chagrin ar glac'har me zo prest da vervel.

Ho pebeus malheur evit eun den tener da guitad e vro,

Ho velet e vuia caret, bars toul dor ar maro.

Pa vijen en faction var ar meneiou huel,

Ma daou lagat a droe var zu Breiz-Izel.

Ma daou lagat a droe var zu ty va mestres,

Mes na vellent netra nemet coajou aliez.

Deus ar mintin a gleven un nombr a lapousset

A mouez ar rossignol, var bec ar veeu pignet,

Ar rossignol a laras din dre e voez melodius :

— Te ho c'heus ebars ar guer eur vestrez carantesus.

— Eur vestres leun a c'hlac'har, a carguet a anken,

A bacue e soc'h partiet, o c'hober pinigen.

Neuze a lavaras din, gant e vouez triomphant :

Me gred e zoc'h glac'haret, couls a c'hi, soudard yaouank

— Var da zal he zeo merket, gant liou an distridiguez,

Penaos he zout anquenet, o quitad da vestres.

Neuze a zisquennas d'an traon da vodik, da vodik,

Hac a teuas var ma scoa, da gana ar musik.

An eostic a laras din quand e voez triomphant :

— Me a vezo fidel doc'h queit ma vec'h no regiment

— Arça eta, eonic bian, mar vec'h din ken fidel,

Ez a iello evidon, da vectec Breiz-Izel.

Ben arc'hoas mintin querquent vel m'a vo scler,

Te a deuio dam c'hamp, da guerc'hat eul liser.

Hanter nos mintin, n'a voa quet scler an de,

Me glevas ma messenger ; var ma freaes e cana.

Lavaret a re din neuse dre e ganaouen ;

— Roet din ar paper, ma partiin souden,  
— Kers eta, eostic bian, da ziou esquel digoret  
A quemeret an hent da vonet da Speyet.

Neur errui bars ar vro te hei da dy ma mestres,  
Ac a commenso cana e quichen e frenes,  
Te a lavaro dei penaus vec'h digasset,  
Deus ar guer a Baris, gant e muia caret.

Dan eur an anter nos erruas an eostic.  
Da houl an digor digant ma mestrezic :  
— Plac'h youank, emezan, digoret din an or  
Me zo digasset aman, gant var sergent-major.

— An den yaouank-se, herves a meus clevet,  
A zo choazet gant Doue, vit bea da pried ;  
Cetu aman eul lizer a neus roet din-me,  
Me ia da partiel breman, da gonta dezan o toare.

Ar bloaves mil eis cant tri-ugent a c'houezec  
Ministr ar brezel e devoa decidet  
Ministr ar brezel en devoa decidet  
A vize bet liberet tout ar blaves unec.

Da ma mestrez ractal, a skrivaz eur lizer  
Evit annonç dezi a voan erru dar guer.  
— Arça eta plac'h yaouanck, a lavara dezi,  
Quemered da joaüsted a quitted da ennui.

Dan deceved a vis dû, a voan partied,  
Deus ar guer a Baris, vit va bro benniguet ;  
Neuse a teuas sonch din na demeus ma mestres.  
Evit un den yaouank, pebeus plijadures.

Neur errui bars ar vro ezon et dy guellet ;  
Neur entreal bars an ty dezy voan non adresset :  
— Bonjour doc'h, ma mestres, cetu me bars er vro,  
Erru on gant joaüsted, da laqua fin da cano.

— Laquet breman e ru an dillajou pa gret  
Laquet lioua en du, pa voan me partiet,  
Laquet breman o torn c'hani o servicher,  
Ma vezimp-ni unisset ar rest deus on amzer.

— Cetu aman eur seïen, evit fin deus or yaouankis,  
A meus digasset doc'h, deus a guer a Baris,  
Conservit anezi, gant o coalen arc'hant,  
Quen a ieffemp on daou ous tol ar sacramant.

— François ques, va servicher, eme ar plac'h, neuse  
Na momp quet ar bonheur derrui bars ar point-se.

Or c'herent o deuz chenchet abaoe zoc'h partiet,  
Ny eo an daou malheurussa |zo gant Doue crouet.

— Ma mestres ! ma mestres ! nam zisconsolet quet.  
Car me a meus eur galon a zo tener meurbet  
Me zo eun den yaouank, tistrei deus an armeio,  
A meus souffret dija nomb bras a dourmancho.

— Mes ebars va oll chagrin-me a nom gonsole,  
Pa ten song din ac'hano'h va dous, c'harante,  
A bremen, va mestres, ma vezémp separé,  
Gant our baret avel. me a vo discaret.

— A possubl a ve eta, a mefemp meritét,  
Deus a beurs or c'berent, un dra quer cri meurbet,  
Deus guenin-me dan illis, bezemp on daou fidel :  
Iamp d'ober or fromesse, dirag en Aviel.

— Neuze ni bedo Doue, ac e Vam beniguet.  
Da rei da dout or c'herent sclerijén, var ar sujet  
Demeus ar bromesse a mump-ny on daou gret  
Da vevi assembles, queit a vimp var ar bed.

— Arça eta, den yaouank. me guemer eur loden,  
Demeus o c'hol chagrin, a demeus o c'hanken ;  
Breman vellan ervad, demeus o propojo,  
Evit on separi, neus nemet ar maro.

— Et breman d'ar guer, a me ia ive,  
Ac informomb or sud, deus bolonte Doue,  
A ben dissul d'abardaë, dan heur goude creiste,  
N'y nom gavo assembles da gonta on doare.

— N'y nom gavo assembles lec'h a mump goulennet  
Sclerijén digant doue, ac e Vam beniguet.  
Laromp breman eur *Bater* rog non zispartial ;  
Quenavo ia, ma mestres, queno dissul guenta.

#### **A n den yaouank errui bars ty e dad**

— Arça eta va sad quez, silaouit va fedén.  
Me ia d'esplicua d'och breman va flanedén,  
Me ia da lavaret d'oc'h ar pes so erruet,  
Ac ar pes a bouez bemde var ma speret.

— C'houec'h vlas so tremenet aboue par ar C'hran  
Voa goneet va c'halon, gant eur plac'hic yaouank  
Gant e c'hamaradezet môa guellet anezi,  
Charmet doa va c'halon, goneze a voa ganti.

An eil guech ma y guellis voa bars illis Sant Per,  
Daoulinet ebars ar c'hœur vis-à-vis dan auter.

Eno pa moa y guellet neuzd a moa songet  
Penaus a voa nu elez deuz an en disquet.

Pa voa echu an overn, voan deut emez an iliz  
D'y gortos bars ar verred, goude fin an offis,  
Pa voa o sortial ar mez deuz ar porchet  
Me zirijas ma fajou vit monet d'y c'havet.

— Bonjour d'oc'h plahic yaouank, roanez an douar,  
Ebars ar Finister, na velfem quet o par,  
Goneet eo ma c'halon g'ieuoc'h plabik, yaouanek,  
Lavaret din, me o ped, breman o sentiment.

— C'hui ez eo, den yaouanek, an ini a garan,  
Neus nemedoc'h d'am laquat errus bars er bed-man,  
Ma c'halonik a voa genoc'hu gonezet,  
Abaoué ar c'henta guec'h, ma guenoc'h parlantet.

— Mar vesimp separet, me vo ar malheurussa  
A zo bet gan Doue crouet bars er bed-ma.  
Rac se, eta or sud ques, desianomp on devez.  
Vit m'a erruffomp tout da barlant assembles,  
C'hoant bras a mup on daou da vea priejo,  
Evit gallout nom garout, tre betec ar maro.

### **Respont dan daou den yaouank**

— Arça'ta daou den yaouank, n'a deuz o maguet,  
Ac evit di-nezi or chonje na po quet,  
N'y na gredomp birviquen z'oc'h galvet gan Doue,  
Car n'a neus evidoc'h voalc'h a fidelité.

### **An daou den yaouank d'o c'herent**

— Ben dissul guenta, epad an overen,  
Eguis domp ni on daou, goulennit sclerigen,  
Evar ar garantez a zo n'or c'halon,  
Ac a pezo respont deuz on affection.

— Na deut quet da gontrariat diou garantez barfait,  
Pere varvo gant glac'har mar vint dispartiet,  
N'y a deu do pedi da rei domp o conge.

Ma vezo gret er bed ma, pes zo laquet gant Doue.

### **Respont dan daou den yaouank**

— Inutil ezeo d'oc'h, insisti davantach,  
Unan ahanoc'h hei dar gouent a ini al dar seoulach,  
N'oc'h quet galvet gant Doue da vea unisset,  
Rac-se eta, daou den yaouank, rac-se nem separet.

### An den yaouank de guerent

— Arça eta, va oll guerent, me ia da lavaret :  
Ranna ret ma c'halon, troubli ret ma speret,  
Me ia da lavaret d'oc'h, quenavo ! quenavo !  
Varc'hoas pe darzo an de, me a vezo maro !!!

### An den yaouank rencontras e vestres

Don heur goude creiste, me gavas va mestres,  
A y glaharet bras a leun a dristigues,  
— Autre Doue, den yaouank peubeus planéden.  
Rannet ezeo ma c'halon, siouas gan un anken.  
Oh ! querent malheurus, c'hui a pe ar galon.

### An daou den yaouank d'ho c'herent

— Preparet o tillat caon, aben arc'hois vintin  
N'y a vo cavet maro, dindan ar veen ivin  
A zo quichen an illis, e cornic er verred,  
A dindan pehini, n'y a vo interret  
Laquet a hanomp, me o ped, dindan ar memes be,  
Evit ma veffomp assembles, hed an eternite ! Amen !

FRANÇOIS RUPPE. (*Propriété de l'Editeur*)

---

## CHANSON NEVEZ

*Var sujet ar gonscrivet yaouank demeure ar  
blavez mil eis kant unec a tri-ugent*

*Domine potentissime da luminem mihi.*

Me o ped ta, va Doue, domp dam sclerigenni  
Evit ma hallin discleria va buez tremenet  
Ac ar poaniou da here, siouas : e zon sujet.

Digorit o tiou scouarn, silaouit un den yaouank  
Pehini neus quitted e vro, a blavez man present  
Er blavez mil eis cant daouzec a tri ugent  
Dar bemp varn-ugent a vis kerzu, vit rei doc'h da gompran

An deis-ee deuz ar mintin, voa deut an ordrenanç  
Da partial dan dregon, evit ar republik Franç  
Cetu ar conscrivet yaouank, oll voa glaharet,  
O clevet ar c'hellou-se, o c'hallon voa rannet.



Obliget da guitad ho c'herent ho mignonet,  
Ho sadou, ho mamou, ho breudeur, ho c'hoarezet,  
Var ma feuillen voa merket ar c'homzo eri a cruel  
« Punisset a vec'h mar vanket d'an appel. »

O vellet a c'homzou-se, va c'halon voa rannet,  
Ann dour a zirede demeus va daoulaguet.  
Cetu me partiet, d'an dregont deus ar mis.  
Hirio mon e mont Valerien, ust a guer a Baris.

Non quet aman va hunan o souffri tourmancho  
Pevar all a zo c'hoas, pere zo deus ma bro  
Evar sujet da bere meus c'hoant da parlanta.  
Car pevar soudard ezint, deus ar vaillanta.

Bemnos nom reunissomp, arog mont da gousket ;  
Or c'hallon ra met unan, pa vemp reunisset ;  
Neuse a parlantomp deus ar plijadurezo  
A mizemp ebars ar guer, gant or c'hamarado.

Pa iejom da bourmen, teue caus deus a vro.  
Gant daelo ou daou lagat, a c'hlebem an encho,  
Evel an druzunet kes, collet ganti e far,  
Pini nom dol da vervel, ractal var an douar.

Pa jonjan em zad, em mam, pere neuz va maguet  
Hac ebars an ty eurus, lec'h ma zon be ganet,  
Neuze e ven scoet a disconlation,  
Ac eguis eun toll lanç a dreus din ma c'hallon.

Pa teu ebars va memor, an amzer passeet,  
Gant ma c'hamaradet a ma c'hamaradezet,  
Deus pere allas !!! allas !!! ezon separet hirio ;  
Pelec'h e zeo et eta, ar plijadurezo

Mump tanveet assembles, couls an nos vel an de :  
Cetu ar pez a basse dre va speret bemde ;  
Ma mestres, ma mestres, aman var ma chanson,  
Me a num recommand d'oc'h, deuz a greiz va c'halon.

Sonjit bars an ini o car, pehin zo en arme,  
Prest da vont en disesper, o c'hortos e gonge  
Breman zo pevar bloas a voan en ho quichen,  
Ac an deiz a hirris mon evar leign eun duchen.

Evar leign eur menez, eu faç dar seiz amzer,  
Ust ar guer capital Franç, mon o souffri miser.  
Divar leign an duchen-man dolan vechou ma zello  
Evar zu ma bro natal, mes netra na vellon.

Nemet ar firmamant pehini zo ust or pen,  
Ac an eol santel ra deomp ar sclerigen ;

Deus an nos o velan c'hoas ar loar ac ar sterret  
Pere contemplom bemnos, arog mont da gousket,  
Demeus sclerigen pere pa voan ebars a vro  
A profiten vit monet d'ober pourmenadenno.  
Cetu aze souveniriou, a zo cri a cruel ;  
Bet truez eus o pugale, tadou, mamou santel.  
Querent ha mignonnet, na houffec'h quet compren  
Ar miseriou a souffhomp aman var an duichen,  
Da poaniou ar brassa ezer sujet bemde,  
Obliget d'ober faction, coulz an noz evel an de,  
Gant ar sac'h var o chouq, o fusil, o sabren  
Ac evit nom reposi neus nemet eur planken  
Henes a zo eur guele a zo yen a kalet  
Evit reposi eur c'horf paour pehini ve scornet  
O tont deus ober faction, dre a glao pe an avel  
A glever en pad an nos, dre o tiou scouarn o yudel.  
Ma vise lavaret din, breman a zo drou uguen mis  
Visem bet quen malheurus • tremen va yaouankis.  
Me mise pedet Doue da dori va flaneden ;  
Mes pa zeo digoet guenin, e zeo rei din y dougen ;  
Ac ebars fin va c'honge marteze vezo brezel,  
Neuze neur vro estranjour, marteze vo ret mervel.  
Sonj't ta tud yaouank, peguen trist ar maro,  
Mervel da bemp hla varnuguen, e creis tan ar c'hanoniou.  
Mar ia ar hellou dar guer da laret vin maro,  
Laquet guenin, n'e o ped, eun nebeut pedanno,  
A neuze ebars ar vro, evel e ma ar c'his  
C'houllan guenoc'h eur *Bater*, pe an *Deprofundis*.  
Mont a ran, va mignonnet, breman da echui.  
Re glac'haret eo va c'halon vit gallout continui ;  
Mes quent evit finissa, meus c'hoant da lavaret  
Hano ar pevar den yaouank, deus pere meus parlan tet  
Unan a zo e hano, Jacques Bourriquen  
An eil demeus ane, e zo Even Gourlaouen  
Isidor Maisonneuve, a Coentin Lagadec,  
An hini diveza zo deus Carais, an tri al deus Spayet.  
Ma moc'h clasq got a clevet piou neus gret ar chanson  
Ma pars ar guer a Paris, rannet e zeo e galon,  
Sergent-major e zeo, demeus ar blavez unec  
E hano zo François Ruppe, demeus bourg Spayet.  
Breman er pemp assembles, or speret bars ar vro  
A laromp dar Finister, *quenavo !!! quenavo !!!*

FRANÇOIS RUPPE (*Propriété de l'Editeur*)

---

Morlaix. — Imp. Lotreguilly, 42, Rue de Paris.